

Adalek 3 bloaz - Ur programm 3 berr-metrad bevaat

Avel er c'horz

45 mn / Filmoù treset 2 vent / Livioù / Les films du Nord & Cinéma Public Films

Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale

Aozañ Troiad ar skolioù : Daoulagad Breizh - www.daoulagad-breizh.org

Tri film berr, gwisket gant sonerezhioù dibar, harozezed souezhus ha tresadennoù kaer-meurbet. Kaset eo teir flac'h an avanturioù-se gant o fent, o c'halon hag un tammig follentez ivez war-du ur vro ma c'hellont c'hoari ar marc'hegezed, kaout ul likorn da vignonez, hag ober d'ar bobl sevel ouzh ur roue gwelch gras d'ar sonerezh ! *Avel er c'horz*, avel ar frankiz hag ar varzhoniezh!

Aerouant ha dantelezh Gant Anaïs Sorrentino (2015 / 5 mn)

Plac'hig an istor-se a gav hir hec'h amzer o c'hoari en ti bihan gant he mignonezed. Kavout a rafe gwelloc'h bezañ ur marc'heg... Mont a ra kuit da neuze, da gaout kamaladed ha kamaladezed all, laouen da gas c'hoarioù all. En em gavout a ra gant un aerouant arru poazh gant e rol a loen drouk, ur c'hazh hag a blijfe dezhañ bezañ penn meur ar c'hoarioù-se, hag ur c'hilhog songarour...



An unkorneg Gant Rémi Durin (2017 / 13 mn)

Ur roue bihan, un dro bennaket, a wel e koadoù e rouantelezh bihan, ur boud gwenn-kann ha dillo eus ar re souezhusañ. Ar roue bihan a ro da urzh d'ar marc'heg Berrgammed da vont da drapout al loen-se, met tro wenn a ra hennezh. Ar rouanez vihan eo a ra d'an unkorneg dont betek er c'hastell. En desped d'ar preder mat a vez roet d'al loen e chom klañv un nebeudig goude se. Penaos e bareañ



A-ziwar an albom *La Licorne* gant Martine Bourre, bet embannet gant an ti Pastel.

Avel er c'horz Gant Nicolas Liguori & Arnaud Demuyne (2017 / 27 mn)

Eliet, 8 vloaz, a vev en ur vro m'eo bet berziet gant ar roue selaou sonerezh. Ur marvailher deuet eus ar Sav-Heol zo bet kenkizet e vinvioù evel-se met n'eo ket prest da sentiñ d'ar reolenn-se. Ar soner ha ne c'hell mui seniñ, hag ar plac'hig bet stummet ur fleüt ganti en ur gorzenn, 'ra anaoudegezh hag asambles e vroudont ar bobl d'en em zizober eus ar mac'homer.



À partir de 3 ans - Un programme de 3 court-métrages

Du vent dans les roseaux

45 min / Animation 2D / Couleurs / Les films du Nord & Cinéma Public Films

Doublage en breton : Dizale

Diffusion de la version bretonne pour les scolaires : Daoulagad Breizh – www.daoulagad-breizh.org

Trois court-métrages, avec des musiques originales, des héroïnes surprenantes et des graphismes sublimes. De l'humour, de l'audace et un brin de folie portent les héroïnes de ces aventures vers un pays où les filles jouent au chevalier, où elles se lient d'amitié avec une licorne, où elles soulèvent leur peuple par la musique contre un roi injuste ! *Le Vent dans les roseaux* souffle un vent de poésie et de liberté !

Dentelles et dragon De Anaïs Sorrentino (2015 / 5 mn)

Par un bel après-midi, une petite fille joue à la dinette avec ses copines. Mais elle s'ennuie profondément car elle préférerait jouer au chevalier. Elle part donc à la recherche de compagnons de jeu à la hauteur de ses ambitions. Elle croise un dragon las de toujours incarner le méchant, un chat qui au contraire souhaiterait un rôle de premier plan et un coq mélomane...



La licorne De Rémi Durin (2017 / 13 mn)

Un jour, un petit roi aperçoit dans la forêt de son petit royaume, un être extraordinaire, blanc comme la neige et rapide comme le vent. Le petit roi ordonne au chevalier Petit-pas de lui ramener la créature, sans succès ! La petite reine réussit à faire venir la licorne au château. L'animal mythique, malgré les bons soins prodigués, tombe malade. Comment la guérir ?



D'après l'album *La Licorne* de Martine Bourre, paru aux éditions Pastel.

Du vent dans les roseaux De Nicolas Liguori & Arnaud Demuyne (2017 / 27 mn)

Eliette, une petite fille de huit ans, vit dans un pays où le roi a interdit la musique. Un troubadour venu d'Orient s'y fait confisquer ses instruments. Mais il est peu enclin à la servitude et rencontre Eliette qui a sculpté en cachette une flûte dans un roseau sauvage. La jeune fille et le troubadour se lient d'amitié. Ensemble, ils vont mener le peuple à se libérer de la tyrannie.

